

Kanaouen ar "reglamant"

War don : Ar pillaouer

I

An neb neus c'hoant da glevet penoz eman ar "reglamant"
Neus ken nemet tostât aman da glevet ma c'hanaouen

DISKAN

Kanomp breman, koz ha yaouank
Kanaouen ar "reglamant"

II

Ar "reglamant" a zo velhen etouez an dud dimezet
Deus an noz ha deus ar mintin aliez ve repetet

III

Pac'h ari Pier pe Ewan ar gêr gant eun tam kovad :
"Te nan out nemet eur fripon, te nan out nemet eur c'horvad"

IV

Me n'on ket evit kompren ennout, te ne glasket nemet evan
Te nan out met eur feneant, te nan oules ket bevan

V

Me c'ha d'ober ma marc'hajou, na ran ket evel ma res te,
Te ne glaskes met dispign arc'hant, me zo en dro d'am bugale

VI

Barz ar gwin ha barz ar butun e lakees da arc'hant te
Wel a ve d'it o zerc'hel da sevel da vugale

VII

Me nan on ket pelec'h ec'h es kenkoulz an noz vel an de
Abandonni a res da venaj, da wreg ha da vugale.

VIII

Deus ar mintin beteg an noz, ha vellan ve kont bemde,
Te na glasket nemet evan, deus an eil ti d'egile

IX

En kalité a dad famille, ia, en giz ma c'hoût te,
Nemet 'karg e gorf' n'out ken hanvet 'mez an holl' a ves noz ha de

X

Goude ma cafin d'an drubuil, Carolin hag Yv-Mari
Peb hini 'nè c'ha 'ne wele, unan anee peb penn d'an ti

XI

Mes an de warlerc'h ar heure Yv-Mari an eva sec'hed
Hag ar wreg a oa hep kozeal, e c'horzaillen n'all ket pad

XII

Carolin, ma c'heuz madelez, 'barz en gras, me fardonet
Roet d'in me eur banac'h jistr, me zo o vont da labouret

XIII

Kes arok 'ta, liver gevier, deut 'chout da glask arre
Dec'h ta gret eur gweld govad, mar gelles 'ri daou fete

XIV

Neuze renkan chench a vuhe ha mont breman d'am labour
Hag evit dijeri ma c'hovad, ma a renkan evan dour.

Hyacinthe LE VAOU

KANAOUEN AR MERC'HED O DEUS GWISKET AR BRAGOU

War don : ar "Valse Parisienne"

I

Tro ma vin plac'h yaouank, me a dalc'ho ar gizioù
Breman 'meus lakéet ober d'in eur bragou
N'eus netra a vrayoc'h evit ar gizioù neve
Pa vo gret ma bragou, me c'heio da valé
Pa 'nen gavo berr an de e tei an amzer galet,
Neuze gant ma bragou hir, me a vezo gwisket,
Me a mo eur bragou berr, ouspen eun habit skanv
Evit monet da valé, breman pa 'c'hario an hanv.

II

En kêr evel war ar mêz, dre lec'h ma valean
An hent ve leun diorien, ia, gant ar c'houerziou skanv
Neuze ar hotred yaouank a digor o daoulagat
O sellet deus pelec'h e teu d'ê ar c'houez vad
Hag e welont o tremen neuze deus o c'hichen
Eur plac'h gwisket en bragou gant eur sigareten
Kenkoulz evel ar bôtred 'nimp breman a vutuno
Bet a meuzomp hon c'harten, ha gwisket ar brago.

III

Breman hon deus droet da gomz, ia, deus töl ar "mairie",
Kenkoulz evel ar bôtred, n'imp dem droet da voti,
Droet m'eump da vean mer, kenkoulz evel "député",
Na vank ken d'imp netra, nemet komandi an "armé",
Bale a reomp dre eus kroec'h, gant an nijerezed,
Kondui al labouriou, kenkoulz evel ar bôtred,
Dirijan ar menajou, ar mêz evel en ti,
Ken kapap 'ec'h e ar plac'h evel ar potr da gomandi.

IV

An devez ma c'hario ar merc'hed d'ober al lezen,
Neuze e renkfet pean, c'houi kôz potred yaouank,
D'an oad a dregont vla da bean e komansfet
Ha war greski bep bla ken ma vefet dimezet,
En kêr evel war ar mêz, koulz 'vel barz peb kontre,
A zo tadou a famill o sevel bugale
Hag hall e moint a c'houlen ma vo gret eul lezen
Vit ma voint sikouret gant ar goz pôtred yaouank.

V

Breman a gafet d'in pôtred, sevel deus töl
Kentan vo privet d'ac'h, vo breman an "alcool"
An "Alcool" a zo kiriek de galz a dourmant,
Velse telc'hfet ho penn hag hoc'h intentamant,
Dre 'velse, pôtred yaouank, c'hom renko suporti
Der'hel mad d'ho kenneren 'vit ma c'halfet dimèi.
Al lezennou a dèi breman a vo gret gant er merc'het
Gwisket o deus ar bragou ha n'o diwiskfont ket.

Hyacinthe LE VAOU



LA MADELEINE

I

Dre ma c'hon plac'h yoanc'k, me a so kontant eus ma stad
Ag a saludan tout, koz, yoanc'k vel tud no noad
Me zo gand joa a renn breman ma yoankis
Ma bue zo koantoc'h wid a fleur da lys
Na neus netra eus ma strubuilly, na gant netra na non gened
Ma diouvec'h a zo o tifritial, barz en greiz an evurusted
Velze deu da song di, vid n'on ked koz en'oad
Ober a resped c'hoas gant ma mamp a ma zad.

DISKAN

Pa lakan ma spered a ma zelou
Welan dro di nemed ros a fleuriou
Gweled a ran arvad barz ma spered
A yoankis a joausted ag a gened
Me chomo ger, assemblez gant ma zad
Dre ma c'hon gantan evurus a mad
Me chomo ger assemblez gant ma mamp
Dre me n'onked skuis c'hoas plac'h yoanc'k.

II

An devez me oa et da ober ma marc'hajou
Rancontris an den yoanc, ag-e guisket vel an otrou
Ma dab e tog ne dorn ag-a deas dem zaludi
Ha de probos di doned da ma regali.
Deus ze den yoanc me zo gontan
Kemenze na refuziked
N'onked henval dimeus a gourman
Permeti ran bean régaled
Koms ra di deus dimi en ti a patisseur
Sonjal ma regali rafe gani affeur.

an diskan

III

Me c'ha dar marc'hajou, kenkouls a dan assembleo
Da bourman alies da dansal dan ébato
Kemer ma plijadur en touez a yoankizou
Pourman war a c'hampagn, kenkouls vel bar ar c'heriou
Na gan netra-me na n'on gened, mé zo vevan n'am liberté.
Pa garan me a c'ha da gousked
Gortoz da zevel ken ve dé. Neusked goad eur fleuren
Ken ker pad eur mis mae. Vel bue plac'h yoanc
Da vean koant a gae.

an diskan

IV

Disked meus labourat, ober stam gruiad a brodan
A pa lakan n'am sonj a ehoman da diskuisan
Dre ma c'hon plac'h yoanc n'a meusked rentan kon d'ober
Deus a labour meus kred, a ken neubeud deus an'amzer
Disked a meus c'hoas len a scrivan
En galek vel en brezonek
Anveout a ran skalz a gerrien
A vezô konted d'ar merc'hed
Me zo n'em liberté
Na meusked a dourman
Netra na vank dime
Me c'homo plac'h yoanc.

an diskan

